

Ilvet milved kent J-K: ar c'hevredigezhioù kentañ
 Goude ganedigezh ar skritur hag al labour-douar e ta ar c'hentañ **keodedoù-Stad**(Our,Ourok...) er **C'hresk strujus**(Mezopotamia,Ejipt)


Vvet kantved kent J-K:
 Aten en he barr: ar strategour **Perikles** a roas urzh da adsevel an temploù àr an **Akropol** hag e voe adsavet **Parthenon** : un templ (un neved) en inor d'an Doueez **Atena**.

56 kent J-K: Trec'h eo ar Wenediz
 trec'h ar Romaned àr ar **Wenediz**: dont a ra an Arvorig da vout edan aotrouniezh Roma.
52 kent J-K: Emgann Alezia, Verkingetoriks ha Kezar
 Trec'h eo **Julius Kezar** àr **Verkingetoriks**, un nobl galian, en **Alezia** : roman e ta Galia da vout.Deroù ar **romanekadur**.

IV-VII kantved: enbroadeg ar Vretoned en Arvorig:
 A-gaoz da gwaskerezh an Angled hag ar Saozon e tec'h kuit lod ag ar **Vretoned** ag o inizi àr-zu an douar bras.

800: kurunadur Karl Veur
 Sakret eo **Karl Veur**, **impalaer ar C'hornôg**, roue ar Franked. Get ar Pab e oa bet roet dezhoñ ar gurunenn a impalaer. E Aac'hen (Aix-la-chapelle) emañ e annez.

845: trec'h Nevenoe àr ar Franked e Ballon: dont a ra **Breizh da vout unvan ha dizalc'h**. Nebeut àr-lerc'h e ta Roazhon ha Naoned da vout stag doc'h Breizh.



VIIIvet kent J-K: Homeros, savidigezh Roma, deroù skritur ar Bibl

Homeros, ur barzh dall a skriv e **800 kent J-K Ilias** (a gont brezel Troia ha nerzh-kalon ar brezeler Akiles) hag **Odiseia** (a gont fin brezel Troia ha distro padus Ulises d'Itaka, e rouantelezh).Diazez ar sevenadur gresian eo ar barzhonegoù-mañ.


Hervez ar vojenn e vehe bet savet kêr Roma tro-dro **753 kent J-K** get **Romulus**.

VIII kent J-K: Er memes kourz e krog **an Hebreed** da skriviñ **ar Bibl**. Orin ar relijionoù pennañ undoueek eo ar Bibl(yuzeviezh, kristeniezh, islam)


An Iañ ha Ilvet kantved goude J-K :ar peoc'h roman
 An impalaeriezh roman en he barr : ur c'hantved a beoc'h a zo er broioù edan beli Roma tro-dro Mor Kreizdouarel. **Ar peoc'h roman** e vez anvet an dra-se. Kreskiñ a ra ar c'hêrioù roman.

Kantved kentañ : Deroù ar gristeniezh
 Diàr ar yuzeviezh, **ar gristeniezh** a zo ganet en impalaeriezh roman. Heuliet a ra ar gristenien kelennadurezh **Jezus Krist marv àr-dro 30** ha diazezet eo àr **an Avieloù**. blezad unan : ganedigezh Jezus e Galilea.

Spisverkoù ar 6vet evit ar Brevet



Spisverkoù ar 5vet



622: Hidjra

E 622 : Kuitaat a reas Mahomed hag e gompagnoned ar Meka evit mont da Yathrib (Medina hiziv-an-deiz) muzulman, pa oa bet kuitaet ar Mekka get Mahomet da).Krogiñ a ra an deiziataer muzulman an deiz-se. An Hidjra (Hegire) a vez graet ag an darvoud-mañ.

1096-1099: ar c'hentañ kroaziadeg

Ar-lerc'h galv ar pab **Urban II** en em stollas ar briñsed kristen evit adkemer **Jeruzalem** d'ar Vuzulmaned e 1099.

XIVvet kantved: Brezel hêrezh

Breizh: e-pad **brezel Kant vlez** e tarzh enebiezh e Breizh etre ar re a faot dezhe kaout un emglev get ar Saozon hag ar re o deus c'hoant tostaat ag ar C'hallaoued.

1492:kentañ beaj Kristobal Kolon


E 1492 e klask Kristobal Kolon tizhout Azia en ur dremen dre ar c'hornôg. Dizoloiñ a reas ur c'hevandir nevez **Amerika**.

1532: Breizh staget

doc'h Frañs: àr- lerc'h marv **Anna Vreizh** e ta Breizh da vout staget en doare ofisiel doc'h rouantelezh Frañs

1598: skrid-embann Naoned

Asantet e oa bet **ar relijion protestant** get **Henri IV** e **1598** war lerc'h lazhadeg Sant Barthelemy.A-drugarez dezhañ e oa bet achu ar brezelioù relijion e oa bet etre 1562 ha 1598.



Xvet-XIIIvet kantved: Maread an ilizoù romanek

Savidigezh ilizoù romanek get ur sevel awenet get an arz romanek(mogerioù tev, frenestroù bihan, bolz-hantergelc'hiek romanek, gwareg ouù torr).

XII-XVvet kantved: maread an ilizoù gotek

Ilizoù brasoc'h hag uheloc'h, sklêrijennet e vez a-drugarez an teknikoù sevel nevez. Diskouez a ra brasder an Iliz katolik(bolz àr groazigell-volz, **gwaregoù-bount**)

XVvet-XVIvet kantved: an Azginivelezh

Emsav arzel hag ur preder eo ,ganet en Italia ha ledanaet en Europa a-bezh. Diazezet àr ur sell nevez àr ar bed , **ar mab-den** hag ivez an darempred get Doue ar pezh a gas ganedigezh ur relijion nevez ,**ar brotestantelezh(Luther, Kalvin)**

1661-1715: ren Loeiz XIV ha savidigezh ar c'hastell Versailles

Ren hiniennel Louis XIV ; Ar-greñvaat eh a ar **vonarkiezh hollveliel**. Arouez ar galloud hollveliel eo **ar c'hastell Versailles**.

1675: emsavadeg ar bonedoù ruz: en em sevel a ra ar Vretoned a-enep kresk an taosoù urzhiet get Loeiz XIV. Flastret eo an emsavadeg get arme ar Roue Heol.

XVIvet ha XVIIvet kantved: oad aour Breizh

Dont a ra Breizh da vout unan a broioù pinvidikañ Europa, strujus eo an ekonomiezh, stank an eskemmoù